

**SKRID 2 GOURFENN
BUGALE CE – CM - SKOLAJ**

AR BLEIZ

1)

O chom e Koad an Noz emañ an Itron, an Aotrou Bleiz hag o daou vugel. Gwechall e oa bras-bras ar goadeg-se met an dud o deus savet tiez e pep lec'h ha bremañ eo bihan-bihan bro ar bleizi. N'eus ket plas ken evit mont da chaseal ! N'eus ket plas ken evit c'hoari trankil ! Ar vugale a gav hir o amzer...

(fin reizhskrivadeg ar CE)

2)

**Hiziv emañ deiz-ha-bloaz Mammig Vleiz. Tadig Bleiz n'en deus kavet loenig ebet evit ar pred gouel. Trist eo ar familh.
- Deomp betek ar gêr vras, marteze e vo kavet ur prof evit Mammig !
eme Lomig d'e c'hoar.
Setu an daou lampon gant o hent. Da gentañ e welont un ti bras-tre gant ur jardin. Ur bern bugale zo o c'hoari bolotenn.**

(fin reizhskrivadeg ar CM)

**Lammet eo an daou vleizig dreist ar voger vihan. Nag a blijadur o klask tapout ar volotenn ! Ar vugale daoudroad zo laouen ivez gant o mignoned nevez. Met pelec'h emañ Lizig ?
Kavet he deus un nor damzigor. Lakaat a ra he fri, he fenn, hag ur pav, hag ar pevar. C'hwezh vat zo ! Kouignoù war an daol ! Paneradoù frouezh ! Kastelodennoù legumaj ! Ha gwelloc'h c'hoazh, pladadoù kig rostet !
O c'hortoz emañ o zud en douarenn, nec'het int. Hag a-greiz-holl e klevont youc'hadennoù skiltrus.
- Deiz-ha-bloaz laouen, Mamm !
Lorc'h zo enno. Bugale fin ha kalonek o deus. Ha pegen saourus ar pred !**

(fin reizhskrivadeg ar skolaj)

MICH BEYER